

## Kent ar gomunion :

*Ar beleg : Setu Oan Doue, setu an Hini a lam pec'hed ar bed :*

Eürus ar re a zo galvet da bred santel an Oan.

**R/ : Man Doue, ned on ket dign ma tait davedon,  
met lârit ur ger hepken hag e vo aesaet din.**

## Komunion : Kalon sakret Jezuz, Kalon sakret ma Doue

Entanit ma c'halon get tan ho karante.

1 Jezuz, a holl viskoazh, ennon hoc'h eus soñjet,

Jezuz, a holl viskoazh, C'hwi ho peus ma c'haret.

2 Petra ho touge-C'hwi da reiñ din ar vuhez,

Petra ho touge-C'hwi nemet ho karantez ?

3 Perak a lein en neañv eh oc'h-C'hwi diskennet

Er c'hraoù a Vethleem ? Rak m'hoc'h eus ma c'haret.

4 Jezuz, àr ar c'halvar, pe liamm ho talc'he

Ariet doc'h ar groaz ? Atav ho karante !

## 'Cit kloziñ an oberenn

*Ar beleg : An Aotrou Doue geneoc'h :*

**R/ : Ha get ho spered !**

*Ar beleg : Doue hollgelloudek d'ho pennigiñ :*

*An Tad, ar Mab hag ar Spered Santel.*

**R/ : Amen !**

*Ar beleg : Kerzhit e peoc'h hor Salver :*

**R/ : Bennozh da Zoue !**

## Kan-dibenn : Allelouia, Allelouia, Allelouia (div wezh)

1 Holl embannit eo mat an Aotrou, peurbad eo e garantez,  
ra lâro tiegezh Israel, peurbad eo e garantez.

2 En anken 'm eus youc'het davetañ ha respontet en deus din,

An Aotrou a zo doc'h ma difenn, ma enebour 'm eus trec'het.

3 Ma nerzh ha ma c'han eo an Aotrou, sklêrijenn eo an Aotrou,  
ne varvin ket, nann, beviñ a rin, E oberoù a ganin.



## Bep sul ketañ ar miz :

overenn da 10e30 e chapel ar Werc'hez.

# Parrez Ker Anna

## An Dreinded Santel

4 a viz Mezheven 2023

« Doue en deus karet kement ar bed,  
m'en deus roet e Vab unganet »

## Kan digor :

1 Meulit an Aotrou Doue, C'hwi holl, e draoù krouet,  
Traoù hag a weler splann, traoù ha ne weler ket,  
Meulit e holl gelloud hiriv, àrc'hoazh, bemdez,  
Meulit da virviken, meulit an Aotrou Doue !

2 Meulit an Aotrou Doue, Arc'haeled hag Aeled

É chom e lein an neañv, e palez an Dreinded !

Get ho telennoù aour, lârit kanenn an Ne,

Meulit da virviken, meulit an Aotrou Doue !

3 Meulit an Aotrou Doue, àr ho tron lugernus,

E mor bras ar splannder, e-tal ho Mab Jezuz,

Gwerc'hez santel Mari, kanit ho karantez,

Meulit da virviken, meulit an Aotrou Doue !

## Salud d'ar bobl :

*Ar beleg : Gras hor Salver Jezuz-Krist, karantez Doue an Tad  
hag unaniezh ar Spered Santel, ra vint geneoc'h-holl :*

**Respont : Ha get ho spered !**

## Kyrie (Ordinal hervez ton gwerz Skolan)

## Gloria : Gloria ! Gloria ! In excelsis Deo !

**Et in terra pax omnibus bonae voluntatis !**

Ho meuliñ a reomp. Ho trugarekaat a reomp. Hoc'h adoriñ a reomp. Enor deoc'h a ganomp ha mil bennozh aveit ho kloar hep par. Aotrou Doue, Roue an neañv, Doue an Tad hollgellougek. *Aotrou, Mab unganet, Salver Jezuz. Aotrou ha Doue, Mab an Tad. C'hwi hag a lamm pec'hed ar bed, ho pet truez doc'homp. C'hwi hag a lamm pec'hed ar bed, degemerit hor pedenn. C'hwi hag a zo azezet en tu dehoù d'an Tad, ho pet truez doc'homp. Rak C'hwi hepken a zo santel. C'hwi hepken a zo Mestr. C'hwi hepken a zo uhel-meurbet, Salver Jezuz, Get ar Spered Santel, e gloar Doue an Tad. Amen !*

## Lennadenn getañ : Lennadenn tennet a levr an Ermaeziadeg

En deizioù-se e savas Moïzez mintin-mat hag e krapas àr manez Sinaï evel ma en doa an Aotrou Doue er gourc'hemennet dezhañ. Hag e kemeras en e zorn an div daolenn vaen. Hag e tiskennas an Aotrou en ur gogusenn, hag e chomas e-tal Moïzez, hag e lâras e anv : Yahve. Hag e tremenas an Aotrou dirak Moïzez en ur ziskleriñ get ur vouezh kreñv : «Aotrou ! Aotrou ! Doue tener a galon ha truezus, leun a basianted, troet da garet ha fidel d'e c'her.» A-benn e kouezhas Moïzez d'an daoulin àr an douar hag e stouas. Hag e lâras : «Mar em eus kavet gras dirak ho taoulagad, Aotrou, daït enta da chom en hor mesk, rak ur Bobl kalet a benn eo houmañ; met c'hwi a bardono hor farioù hag hor pec'hedoù, hag a ray ac'hanomp ur bobl hag a vo deoc'h.».

Setu komz an Aotrou Doue : **Bennozh da Zoue !**

## Kantik Daniel : Ra vo meulet !

Ra vehet benniget, Aotrou, Doue hon tadoù;

Deoc'h-c'hwi melasion ha gloar da viken !

Ra vo benniget hoc'h anv gloriüs ha santel;

Deoc'h-c'hwi melasion ha gloar da viken !

Ra vehet benniget en ho templ santel ha gloriüs;

Deoc'h-c'hwi melasion ha gloar da viken !

Ra vehet benniget àr ho tron a roue;

Deoc'h-c'hwi melasion ha gloar da viken !

Ra vehet benniget, c'hwi hag a wel e sol an islonkouù;

Deoc'h-c'hwi melasion ha gloar da viken !

Ra vehet benniget, c'hwi hag a zo azezet dreist ar Gerubined;

Deoc'h-c'hwi melasion ha gloar da viken !

C'hwi holl, oberoù an Aotrou, benniget an Aotrou;

Deoc'h-c'hwi melasion ha gloar da viken !

## Eil lennadenn : Lennadenn tennet a eil lizher an Apostol Paol d'ar Gorintiz.

Breuder, bezit laouen, labourit d'en em santelaat, roit kalon an eil d'egile, bezit unan a spered, bevit er peoc'h, ha Doue ar garantez hag ar peoc'h a vo geneoc'h. En em saludet an eil egile get ar pok santel. An holl sent ho salud. Gras an Aotrou Jezuz-Krist, karantez Doue ha komunion ar Spered Santel ra vint geneoc'h holl. Setu komz an Aotrou Doue : **Bennozh da Zoue !**

Aviel : Ar beleg : An Aotrou Doue geneoc'h : **R/ : Ha get ho spered.**

Ar beleg : Lennadenn ag an Aviel santel hervez St Yehann.

**R/ : Gloar deoc'h-Chwi, ô Aotrou Krist !**

Doue en deus karet kement ar bed, m'en deus roet e Vab unganet, evit n'en em gollo hini a gement a gred ennañ, met m'eo devo holl ar vuhez peurbadus. Rak Doue n'en deus ket kaset e Vab er bed evit barniñ ar bed, met evit ma vo salvet ar bed drezañ. An nep a gred ennañ n'eo ket barnet; an nep na gred ket ennañ a zo barnet avat hag a-vremañ, rak n'en deus ket kredet e Mab unganet Doue.

Setu Komz an Aotrou : **Meuleudi deoc'h, ô Aotrou Krist !**

Kredo : Me 'gred e Doue, an Tad hollgelloudek, Kroueour an neañv hag an douar, hag e Jezuz-Krist, e Vab unganet, hon Aotrou, a zo bet koñsevet dre nerzh ar Spered Santel, ganet ag ar Werc'hez Vari, en deus gouzañvet dindan Poñs Pilat, a zo bet staget doc'h ar groaz, marvet ha bet lakaet er bez, diskennet d'an ifernioù, daet a varv da vev an drivet deiz, pignet d'an neañv, hag azezet en tu dehoù an Tad, a-eno e tay da varn ar re vev hag ar re varv. Me 'gred er Spered Santel, en Iliz santel katolik, e kumunded ar Sent, e pardon ar pec'hedoù, e adsav ar re varv, er vuhez peurbadus. Amen !

## Pedenn hollbedel :

**Aotrou, hon Doue, ô Tad Santel, selaouit hor pedenn !**

Lid ar profoù : ar beleg : Pedit, mam breudeur, ma plijo get Doue an Tad hollgelloudek degemer ma sakrifis a zo ivez ho hani-c'hwi :

**R/ : Plijet get Doue en degemer ag ho taouarn, aveit e c'hloar hag e veuleudi, aveit hor mad-ni hag hani an Iliz.**

## Prefas :

Ar beleg : An Aotrou Doue geneoc'h :

**R/ : Ha get ho spered !**

Ar beleg : Hor c'halon d'an uhel :

**R/ : Emañ troet trema Doue !**

Ar beleg : Trugarekaomp hon Aotrou Doue :

**R/ : Just ha santel eo !**

## Santel : Santel ! Santel ! Santel ! An Aotrou Doue, Mestr ar bed !

Lan eo get ho kloar an ne hag an douar : **Hosanna e lein an ne !**

Benniget an hani a za e anv Doue : **Hosanna e lein an ne !**

Gorreoù : **Degas 'reomp da soñj ag ho marv, Aotrou Krist savet da vev, Ha gortoz a reomp ho tistro.**

Hon Tad : hag a zo en neañv, hoc'h anv ra vo santelaet, Ho rouantelezh degaset deomp, Ho vennantez ra vo graet àr an douar 'vel an neañv.

Roit deomp hiriv hor bara pemdeziek, Pardonit deomp hor pec'hedoù, 'vel ma pardonomp d'ar re o deus pec'hed doc'homp, Ha n'hon laosket ket da gouezh en tantasion, Met hon diwallit doc'h an droug.

Ar beleg : Plijet geneoc'h, Aotrou Doue,... ha distro hor Salver Jezuz-Krist :

**R/ : Rak deoc'h-C'hwi, Aotrou Doue, emañ ar Rouantelezh hag ar gloar a-holl-viskoazh da virviken. Amen.**

## Oan Doue :

**Oan Doue a lam pec'hedoù ar bed : ho pet truez doc'homp ! (bis)  
Roit deomp ar peoc'h !**